

KIS-715 – Diskouezadeg war istor ar brezhoneg

[Kregiñ a ra da dreiñ un diskouezadeg aozet gant Mikael Coïc dindan an talbenn “La langue bretonne à travers les âges”. Gwreeta eo bet e Post Ploveilh a-hed Here 2000, e Maerdi Ploveilh eus an 3 d’an 18 Meurzh a-raok mont d’ar *Collège-Lycée Les Carmes Saint-Gabriel* e Pont 'n Abad ma vo eus 19 betek an 30 Meurzh ha d'al *Lycée Saint-Louis* en Oriant ma chomo eus ar 17 d’an 30 Ebrel.]

(RLN da MC – 17 03 01)

Da 'm meno e 'c'h eus erouezet ar pep pouezusañ eus istor ar yezh hag aozet an traoù en un doare hentennek kenan adalek an indezeuropeg betek oberennoù diwezhañ *Preder* en ur dremen dre holl lankadoù istor ar brezhoneg. Diskouezet 'c'h eus splann ez eus daou arvez gant an istor-se. Diouzh un tu ur yezh dilezet gant renkadoù pinvidik ha stuziet ar gevredigezh, o tont da vezañ tra ar renkadoù paour ha digelenn nemeto, o koll un darn vat eus he loazioù hag o vont war vruzunañ en ur bern teodyezhoù. Diouzh an tu all, un emsav, ennañ tud evel LAGADEUG, an Tad MANER, AR PELLETER, GREGOR, AR GONIDEG, KERVARKER, MORDIERN, VALLEE, Roparz HEMON hag izili all luskad *Gwalarn*, o strivañ da ober eus ar brezhoneg ur yezh a sevenadur. War a 'c'h eus lavaret din, eo bet displejet Fanch BROUDIC¹ dres gant erouezadur an arvez emsavel (hag eñ zo da souezhañ ?). Met n'eo BROUDIC, koulz ha LE BERRE ha LE DU², nemet erounezerion, ha reoù a renk izel, eus leviadurezh ar P. C. F. e-keñver ar yezhoù bihanniverek eus Frañs. Ur c'hefredour komunour diles ne gollfe ket e amzer oc'h ober pezh a reont. Ouzh ar vevenn, e kavan lei droch GREMETZ o tifenn hemolc'herion Pleg Mor ar Somme eget LE BERRE ha LE DU o klask distrujañ kement egin 'zo a sevenadur brezhonek.

Un dra deurus 'm eus diskoachet e dibenn *Istor Breizh* Louis ÉLEGOËT ; sontadegoù graet e Breizh er bloavezhioù 1990 o deus lakaet a-wel ez eus ur c'hemmoed yaek gant ar brezhoneg hiziv an deiz e-touez an darn vrasañ eus Breizhiz.

¹ Erouezour ar c'hasadennoù brezhonek e *FR3-Iroise*.

² Kelennerion Rann ar C'heltieg en *Université de Bretagne Occidentale*, Brest. Sl. ivez KIS-643, La-13, pp. 79 hh.

Ha nevez eo kement-se evel just. E 1950, da skouer, he doa ar yezh ur c'hemmoed a werlerc'hiadur, a c'houlerc'h kefredel. Ouzhpenn se, da heul darvoudoù ar Gouzalc'h alaman, en doa ar brezhoneg paket ul liv a vratellerezh, a genwallerezh gant an nazied. En un hantergantved ez eus c'hoarvezet enta ur c'hemm bras tre en doare ma vez kantaezet ar brezhoneg gant ar boblañs vreizhat, hag emsavus kenan eo dimp evel just ar c'hemm-se. Dres, o vezañ ma 'c'h eus goulennet ouzhin ha ne 'm befe ket kinnigadennoù da ober, e 'm eus soñjet en ur banell, a ve da lakaat e dibenn eroladur gweladennerion an diskouezadeg, ma ve graet meneg eus ar c'hemm-se er c'hedveno breizhat. Nemet diouzhtu war-lerc'h e ve dav ober ar goulenn-mañ : pe vrezhoneg a fell dimp kaout ? Hag e fell dimp peurechuiñ diskar ar yezh pe bezañ e hil an emsaverion a zo bet abaoe LAGADEUG ? War ur banell all e 'c'h eus skrivet, gant gwir abeg, ez eus bremañ ur bern kelennerion war ar brezhoneg na anavezont ent werc'hel nag ar yezh nag istor ar yezh hag a gred e spiro o youl vat evit difallañ an diouerennoù-se. Hevelep tud na ouzont ket ez eus da ober an dibab ha n'int ket gouest kennebeut da zisplegañ d'o skolidi ne c'haller ket tremen hebiou dezhañ. War ar banell a ginnigan e c'hallfed pleustriñ war an divoud : reizh eo lakaat ar gweladenner, e dibenn e eroladur, da brederiañ war an argraf-se.

Haeret e 'c'h eus din eo bet a-du an holl weladennerion, BROUDIC lakaet er-maez, evit lavarout ez eus da genderc'hel gant diorreadur ar yezh ha goveliadur gerioù nevez. Ouzhpenn se ne zeue ket ar weladennerion eus ar metaouioù breizhek. Met dres peogwir e vevont er bed gall penn da benn, e vevont en ur bed louet : n'int ket bet kollet en o hunvreoù evel tud ar Mouvamant. Ne vezont ket direnket an disterañ gant ar c'heriaoueg arnevez dre ma ouzont ervat e klot houmañ gant un ezhomm gwerc'hel.

(MC – 25 03 01)

Un nebeut resisadurioù ouzhpenn. Evit hogos an holl weladennerion e oa an diskouezadeg un dizoloadenn. Ar wech kentañ oa dezho klevout en deus ar brezhoneg un istor hag ez eus anezhañ ur yezh wirion, n'eo ket un trefod lec'hel. Ne gomprenent ket perak ne oa ket bet desket kement-se dezho er skol ha keuz oa ganto da vezañ dic'houest da lenn ha da skrivañ ar yezh. War un dro e teue anat dezho ez eo ar yezhoù korfoù bev oc'h emdreñ : merzhout a raent ez eo ar galleg leun a c'herioù a oa dianav pemont vloaz 'zo ; ken reizh eo enta d'ar brezhoneg ha da ne vern pe yezh all kaout gerioù nevez evit an armerzh, ar vezekniezh, ar mediaoù...

Nebeut tre a dud eus al luskadoù breizhek a voe e-touez ar weladennerion. Souezhet e tiskoueze bezañ kazetenner *Le Télégramme* o stadañ ne oa deuet den eus

skolioù *Diwan*. Da verkañ eo e voe degaset gant o c'helennerz vrezhonek skolidi a 'r c'hwec'hvet hag ar pempet klas eus skolaj deskadurezh foran Pont 'n Abad.